



PEDEN AR MOUSIK BIAN

D'AR WERC'HEZ.

War don : *Potred Plouilliau, Kan 75.*

Ma mammik gez ha ma ferson
 A lavare d'in bemde
 Ho pidi a greiz ma c'halon
 Ha da noz a da veure.
 Ma chelaouet, Gwerc'hez santel,
 Evit mamm ho kemerann,
 Eur zellik hep ken, ia! eur zell
 War ar paour mousik bian!

An evnedigou pa greskont
 A ia er mez euz ho nez :
 Da gentan gand aon e nijont ;
 Ho mamm zo war ho evez.
 Pell man ma mamm, Gwerc'hez santel,
 Evit mamm ho kemerann :
 Eur zellik hep ken, ia! eur zell
 War ar paour mousik bian!

Pa m'euz bet laret kenavo
 D'am mamm gez war he gwele :
 Pegoulz, em-hei, evi distro!
 Ha ma mamm b'our a wele.
 Dinec'het-hi, Gwerc'hez santel,
 He foan eo ma foan vrassan :
 Eur zellik hep ken, ia! eur zell
 War vamm ar mousik bian!

Ma c'hoarik vad, ma c'hoar Anna
A iel d'an iliz bemde
D'ho pidi c'hoaz, Itron Varia,
Vit ma zad, vidon ive,
Chelaouet-hi, Gwerc'hez santel,
Eun ine diouz ar gwellan :
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War c'hoar ar mousik bian !

Pa iemp da laret hon peden
Hon daouigou d'ho chapel
Ma c'hoar lare : « Sell eun dolen
» War-n-hi ar Werc'hez santel
» Hag a c'hoarz ouzimp gant true !
(A oamp enn oad teneran)
» Ma sellet ha ma breur ive
» Ar paour kez mousik bian ! »

Ennho tolen, o Gwerc'hez kaër,
E weler ho mab Jezuz
War ho tivrec'h, bugel dister,
Ken mad, ken karantezuz.
Ho mab dinac'h netra ne hall,
D'ac'h, Mamm ar c'halloudekan,
Gallout a c'hellet ta diwall
Ar c'hez paour mousik bian !

Ma mamm a lare d'in liez :
Eo mestr a bep tra Doue ;
Mes Jezuz zo Mab ar Gwerc'hez :
Petra n'hell mamm eur Roue ?
Ma diwallet, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann ;
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War ar paour mousik bian !